



Al louarn hag ar yar

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Pal ar c'hoari

Div volotenn o vont da heul an eil d'eben. Piv 'vo al louarn ? Piv 'vo ar yar ?

Da gaout

2 volotenn pe div skerb skoulmet

Gant piv ?

etre 10 hag 20 c'hoarier war ur c'helc'h

Mont en-dro ar c'hoari

Daou c'hoarier rag-enep an eil d'egile war ar c'helc'h o deus da gaout pep hini ur volotenn.

Pep hini diouzh galv ar c'hasour, a stlep ar volotenn d'e amezeg a-gleiz a stlep d'e amezeg dezhañ a-gleiz ivez hag all, hag all...

Kollet e vez gant ur c'hoarier pa erru an div volotenn gantañ.

Un doare all da c'hoari

tal ouzh tal, war ziv regennad emañ an daou skipailh.

Ur volotenn vo añvet « ar yar » hag eben « al louarn » ;

E penn kentañ ar c'hoari emañ ar yar hag al louarn gant c'hoarier kentañ skipailh A

C'hoarier kentañ ar skipailh A a stlep ar volotenn da c'hoarier kentañ ar skipailh B a stlep anezhi d'an eil c'hoarier e skipailh A ; ar yar a c'hourgamm etre an daou skipailh.

Diouzhtu goude bezañ stlepet ar yar gant c'hoarier kentañ ar skipailh A e stlep hennezh ar volotenn añvet al louarn hag a heul ar memes hent ;

Ma vez kejet gant ar yar hag al louarn e vez gounezet ur poent gant skipailh A ; ma ne teu ket a-benn al louarn da dapout ar yar e vez ar poent evit skipailh B ;

War-lerc'h eo tro ar skipailh B da gregiñ gant ar yar ;

Divizet e vez en araok pet gwech e vo c'hoarier ;

Difennet eo d'ur c'hoarier mirout ar volotenn.

